

# INTAON AL LOCHENN.

1<sup>er</sup>.

Er bed-màn nak aour nak arc'hant  
 N'ho deus biskoas staghet va c'halon ;  
 N'hon nemert eur c'hès paisant ,  
 Hevrus he voann em c'hondition ;  
 Mais va fried karantezus  
 Hirio a gollán , pebès ankenn !  
 Goëlet a n'hón ket malhevrus ?  
 C'huec'h krouadur am eus em lochenn.

2<sup>me</sup>.

D'ar c'houlz ma voa beo va friët ,  
 He furnès a charme va c'halon ;  
 Va bugale eus va c'haret ,  
 A roë diñ konsolation ;

— 15 —

Bep eil oll he pokenn deze ,  
 Un tad hevrussoc'h na vo bikenn ,  
 Dre ho jestou tener bemdè  
 He voann hevrus ebars em lochenn.

3<sup>me</sup>.

Da vintin , pa zan d'am parkou  
 Adare da gommans va devès ,  
 He lesan va bugaligou  
 Eus va zi da ghemerad evès ,  
 Ha da noz , pa deuan en dro ,  
 Evit va distrei eus va ankenn  
 En em stardont oll var va zro ,  
 D'am c'honsoli ebars em lochenn.

4<sup>me</sup>.

Bras voa va laouenidighès  
 Pa vijenn er ghèr gant va ziad ,  
 Bremàn pa velan va merc'h kès  
 An dour a deu var va daoulagad ;  
 Seblantout a ra din bepret  
 Goëlet he mam dener em c'hichenn ,  
 En despet d'am c'heus diremet  
 Hon c'hoas hevrus ebars em lochenn.

5<sup>me</sup>.

O ma c'halfenn eb kaout miser  
 Sevel ha deski va bugale !  
 Me a halfè gant ann amser  
 Fortunia va merc'hik martese ;

— 16 —

Neuse va fautret a veo bras ,  
Barrek da labourad un dachenn ,  
Em chozni mèn a hallo c'hoas  
Beza hevrus ebars em lochenn .

Gme.

Hevrus meurbed me n'em gavo  
P'ho goëlin ho c'hounit ho bara ,  
Neuse pa deuio ar maro  
Eus ar vuez-màn d'am dilivra ,  
Va minnionet am enterro  
Gant va friet pe en e c'hichenn ,  
A va bugale a ranno  
Va zam tieghès ha va lochenn .

LE GLANEUR CELTOMANE.



---

Imprimet e MONTROULEZ, e ty V<sup>r</sup> GUILMER.